

LOUIZAN PENNEK

Ton : *Kentan komjou a diskiz*

En-kerz ar bla mil eiz kant triwec'h ha pewar ugent,
Prest goude ma oa devet iliz koz ar Gouent,
Pac'h eaz war he c'hantved Louizan ar Genkiz,
Zilaouet a c'hoarveaz eun nozvez, Beariz :

Na perag 'ta en noz-ze, perag na gousken ket ?
Na ren nemet envori amzeriou tremenet...
En-berr ha me o klevet *Kloc'h ar Venec'h* en brall
Hag o welet o iliz 'n he zav evel gwech-all !

Eurskleuren astrinkenn-i, koantoc'h 'vit goulou-de,
Tro-war-dro aeledigou zeder a darnije ;
Na zanten den o kerzet, hag ên a vandenno,
Dre der zor e tirede tud veo ha tud varo !

Ha merc'h henan ar barrouz dirag an aoter vraz ;
Stouet gant he bugale, en he c'hichen eur gwaz
A lare dre e beden : « kant vla 'zo hir-vue,
« O ma ouefec'h, ma fried, pegen berr int en Nê ! »

Sethu Person-Personik (1) en tîl an hanter-noz,
O tostât d'ofereni gant hon beleien goz,
Dirag zant Men, zant Bernard ha zantez Tunvella,
Zantez Anna, zant Ervoan ha zantez Gueneza. (2)

War an dolen e trident pa groze an ogro ;
Banielou 'n Otro Hery (3), bep hini en e dro,
A zalude pa deue gant an dud war ar gan,
Hano Louizan 'n eur vouez : « Louizan, Louizan!... »

Hag eur beleg er gador, 'n eur vale dierc'hen,
Nag e ve e zaoulagad evel div stereden,
A-ziabell d'ar *Minez n' vo ket dizanveet*,
An *Tadik-Koz* e vezo, an *Tadik-Koz* bepred. (4)

(1) Lez-hano an otro Person, breur-kaer Louizan Pennek, maro en Pleuveur-Gaultier.

(2) Zent enoret er barrouz.

(3) An otro Hery, a na groet liva patrom prosesion ar barrouz didan tolen gaer an otro Gouezou 'dreg an aoter-vraz.

(4) An otro Guilhermik n'an evoa nemet eur lagad vad. « C'houi 'wel aman » a oa e gomz da laret. Hervez kôz ar re goz, e ouie dizrei pedennou an oferen adaleg ar poz diweza beteg an hini kentan — (oferenn an dranten) — gant ma vije « *beleg betek an douar* » *dierec'hen* ; hag e lare 'nei, emê, war *Vinez-Bre*, eur wech an amzer.

Ton : *Zant Joseb, pried Mari*

« Tud evuruz, « c'houi wel aman ! » eme hon ferson koz,
« P'eo da gerc'hed *Anez* omp diskennet fennoz,
« Leret d'eomp, aele vihan, beleien, pevien gaez,
« Penôz he deuz dizeblant groet he zilvidigez. »

War don : *Baradoz dudiu*

« Paret en bolz an Nê
« Gwerelaouen vinniget,
« Ha ma tarzo an de
« Ma tle bean kurunet !... »

War don : *O pebez kelou, o ma Doue*

Hag an aele, dornik-ha-dornik,
En-dro war eur wabren,
An eostik-noz a bleg e vouezik
Da heul o c'hanaouen :
« Deut c'houi, emê, o Mamm Doue,
« Hoc'h-unan war he maro,
« 'Vit ma nijo du-hont hec'h ine,
« 'Vel eur goulmik d'he bro.

« Ha n'omp-ni ket he bugaligou ?
« En-kreiz eur goumoulen,
« Ni eo a zougo hon mammigou
« War hon diweskel gwenn !
« Dreist an oabl pebez digemer
« En palez braz hon Roue !
« Zonet telen aour barzed Treger
« Gant aezen ar beure.

« Digoret frank, zent ha zentezed,
« Doriou ar baradoz,
« 'Lec'h ma vimp 'vel bleuiou diwanet
« En-dro d'hon mammig-koz !
« O ma ouefec'h pegen huel
« Ac'h et 'blamour d'hoc'h aele,
« Biken kri forz, mammou Breiz-Izel,
« Na rafec'h war o be !

War don : *Baradoz dudiu*

« Pa bar ar c'hourlaouen,
« 'Ve ar beleg o pedi
« Ha nerzusan peden,
« Pa zent Doue diout-i ! »

War don : *Aele deuz ar Baradoz*

« 'Grenn-dost da lenn Boulaouger, 'kichen bourg
« Eoabepred, 'n hec'hozni, enor he beleien; [Laneven
« Doue 'lez gant o mignon bue hir peurvuan. »
—Ha me, a greiz ma c'halon, ma-c'hunan da ganan.

« Na redi ken er Braden (1) dourik Guergwiniou,
« Pa vò c'hoaz ar Gerforest rouanez ar c'heriou...
« O Krec'h-Alen, o Kenkiz ! ho tud-c'houi a vevo,
« Nag a ve red da Jezuz ober c'hoaz burzudo !

« Dre m'hoc'h euz bet gouveet e talc'he ar belek
« Plas eun Doue er bed-man, Louizan ar Pennek,
« Eur berlezen a lintro 'uz d'ho penn er bed-all
« A vo d'ac'h gant « AR BELEK » (2) lakeet war
[ho tal.

« Herminik wenn an Arvor, c'houi oa bet brudet
kaer !

« Daoust hag ên 'pe ankoueet, kement 'vel a lerer,
« 'Neuz, war jijen hon c'hroajou, poulet goad ho
mibien !...

« O Breiz, difen da Zoue ! Kred c'hoaz d'e veleien ! »

War don : *A Vraban e oa ginidik*

« Ni a garje kavet ive
« Mouejou karantezuz aele,
« Da ganan d'ac'h, gant beleien,
« Bennoz Doue ! c'hoar ar bevien.

« Nag a c'hoanvez evid-omp-ni
« O deuz kerzet ho kwerzidi...
« An troiou a zo bet kontet,
« Hag an neudennou muzulet.

« C'houi 'gas d'ar paour 'n e glenvejou
« Laez diwar yeod dru ho prajou,
« Tan da domman, war an oaled,
« Mailhurou e newe-c'haned.

« C'houi 'ro 'vel a blij da Jezuz
« Heb gout d'ho torn, c'houi 'ro en kuz...
« Ha zioul, war varr hoc'h aluzen,
« Da dôl blaz vad, eur c'hoarzaden !...

« Deut gant Doue da ziskwizan,
« P'hoc'h euz bet gwisket Anezan,
« Reit d'ean da lojan 'n ho ti
« Ha deuz ho para da zibri !

« Ha re vihan Laneweniz
« A iel c'hoaz bemde d'ar Genkiz,
« Enon 'tisker d'ar c'hrouadur
« Karout e vamm ha bevan fur.

« Neb a rozel arc'hant hag aour,
« Mar na zastum mennoz ar paour,

« 'Vo enkok'h d'ean dor an Ne
« 'Vit d'eur funien kros eun oade. »

War don : *Zant Joseb pried Mari.*

« Achu eo 'ta ma devez...
« Ma c'houezen, war an erv,
« A ziveraz aliez...
« Trugare d'am C'hrouer !
« Rag c'houi, glizen vurzuduz,
« Eo a steredenno
« Ouz ar zeien lugernuz
« A dougin en Nevo !
« Eun eurvez en ilizou
« A dalv muoc'h d'an den
« Evid plijadurezou
« Nag an ne pell da ren.
« Keno, iliz Lanewen,
« Ha kement a garan...
« Ma diwean kimiaden
« A vo d'am Yaouankan.

« Eur wech c'hoaz, deuz, ma bugel,
« Etre divrec'h ar vamm
« A bedaz ouz da gayel...
« Da ine oa ken flamm !
« Evid-out-te da Zoue
« 'C'ha gan-in d'an Nevo
« Hirvouden kant vla vue,
« Kenavo ! Kenavo !
« Mar zav biken 'n es kenver
« Avel diroll ebet,
« Da ziwall euz gwall-amzer,
« E teui d'ar vered.
« Ouz men ma be daoulinet
« Zilaou, ha te 'glevo,
« Ma c'halon c'hoaz o laret :
« Kenavo ! Kenavo ! »

War don : *O pebez kelou, o ma Doue !*

Hag o tremen 'vel eul lufeden,
Aerkent hag he c'himiad,
Ar zeblant dudiu a welen
Dirag ma daoulagad ;
Med e kleven c'hoaz em hunvre,
E kleviz 'kreiz an noz,
Ha war flourât dre ma pellee,
Kantik ar baradoz !

An de war-lerc'h 'benn ma tifuniz,
O kelou ankeniuz !
Ar c'haon da Louizan ar Genkiz
A zone truezuz !
Beariz, zec'het ha kouelven,
Hec'h ine gant hec'h aele,
He feviennou hag he beleien,
A zo pignet d'an Ne !

L. J. C.

(1) Hano eur Vereri.

(2) Ar Belek Jezuz.